

RECIT

*Deus eur miracl burzudus c'hoarvezet gant eun itron vras
dre brotection Itron-Varia ar Folgoat.*

Var eun ton trist.



Mac'harit Frogil d'he mamm.

Ma mamm id evidon d'ar Folgoat,
Dierc'hen, discabel, voar ho taou
[drond.

He mamm.

Petra a v'aleur oc'h eus groet,
D'ar Folgoat pa leret monet.

Mac'harit.

Ma flac'hic ma flac'h a gamp
E deus lazet ec'h innoçant
E deus lazet ec'h innoçant
Hep c'ristines na badeziant.
Hen laquet, zivoas ! em goele,
Eur gontel noaz n'he goste cleiz.
Allas ! hi a zo achappet ;
Me eviti vo quemeret !

Oa quet he guir peur achuet
Archerien en ti zo antreet.
Trivoac'h archer eus a Raon,
Trivoac'h all a Lanhuon.
Da guerc'hat Mac'harit d'ar prison.

Çri vije ar galon ma na vorlje,
Voar hent bras Raon oep a vije,
O vonet d'ar prison entre tri,
Ar buguel n'eur banner dirazi.

Ha ma terre bele ma c'he :
N'eo quet din ar buguel-ze
Ma flac'hic, ma flac'h a gamp
E deus lazet ec'h innoçant.

E deus lazet ec'h innoçant
Hep christenez na badeziant,
Ha laquet nean em goele
Eur gontel noaz n'he goste cleiz,
Allas ! hi a zo achappet,
Ha me vit-hi zo quemeret.

Mac'harit Frogil a c'houlenne
Er guer ar Raon p'en antree :
Petec'h man ar prison aman
Ma zo Mac'harit en han.

Ar geolieres a lavare
Da Vac'harit Frogil neuse :
Tevet, Mac'harit, na oetet quet,
Prizon d'ho laquat na vanquo quet.

Mac'harit.

Me garle caout eur messenger
Da gas evidon eur lizer.
Ar geolieres a lavare
Ha Vac'harit Frogil neuse :
Srivet ho lizer pa guerfet,
Messajourien dec'h na vanquo quet.

Mac'harit.

Da gas eul lizer d'am maërones
Merquet varnezan ar vuirionnez.
Pa n'arri al lizer gant he maërones
E oe carguet a dristidiguez,
Petra bennag ma oa en creiz ar zal
O canan, o tripall, o tansal.

Ar paj bian.

Ceto aze al lizer : leannet-han :
Merquet ar vuirionnez voarnezan.

He maërones.

Me na oellen quet eun daquen
Vit quela len eun tam feuillen.
Voa quet ar feuillen digored mad
Ma coez an dour n'he daoc'lagad ;
Oa quet al lizer c'hanter leannet
Ter goech d'an douar eo zemplet.

He maërones.

Lequet ma c'haros din voar bost
Ma zin da Raon evit an noz ;
Lequet seiz a guezec voarnezan,
Lequet a rog a re voellan.

Ha pa dilfe ar marc'h hep cammet,
Betec Raon renquan monet !
Ha pa dilfe ar marc'h en peb heur,
Me a reoq mont di en ter heur.

Mac'harit Frogil a lavare
Na oar ar polanç pa bigoc :
Tud a justis, ma rafac'h o tever.
C'hui rofe din eun tam amzer,
Ann amzer da distrei en dro,
Ma larin deoc'h eur guir pe daou.
Me voel erru ma maëronez
Assamblez gant-hi eur varonez

Hac eur c'harroz equiped mad,
Er pen a rog Goerc'hes ar Follgoat.
He maëronez a c'houlenne
Digant ha fillores neuze ;
Petra a valeur ho peus groet
P'hen doo'h d'ar prison digasset ?

Marc'harit.

Ma maërones, am excuzet
Netra a valeur na meus groet ;
Ma flac'hic, ma flac'h a gamb
He deus lazet he innoçant
Hep christenez na badeziant.
Hep christenez na badeziant ;
Ha laquet nean em guele
Eur gontel noas ne goste cleiz.
Allas ! hi a zo achappet
Ha me ne flas zo quemeret.

Ar vaëronez a lavare
D'ar boureo cri neuze ;
Laquet ma fillores er valans
Me rei he foezans en chevaus.

Poezet-hi eur vech ha diou vech ;
Me rei e foezans aour he guech ;
Poezaoz ma c'haros ha ma c'hezeq,
Ho foezans diou vech mar he red.

Ar boureo cri a respontas
D'ar vaëronez p'he c'hlevas :
N'en doc'h quiet quen caer da varonez
M'ho pe poezans ho fillores.

Ar boureo cri a lavare
'Vellen d'he geolier neuze :
Laquet anezi er potans
Rac an heur bepret a avans.

Ar geolier.

Bet on ter guech voar he diou scoa
Ha nemed c'hoarzin ouzin na ra.

Ar boureo.

Quemer eur gontel pe eul lançon
Ha sco anezi don n'he c'halon.

Ar geolier.

Scoet meus-hi ter guech ennin,
Ha met c'hoarzin na ra ouzin.

Ar boureo.

Ma, querz ganti d'ar fagoderi :
Groa eun tantat tan evit e devi.
Eun tantat tan a dri c'hant queunet
Marc'harit n'he greiz vo taulet.

He mates a lavare
D'he c'hamaradez enn de a oe :
Hirio zo eun devez caer en Raon,
Lezemp pep tra en abandon.

Guiscomp hon habijou satin glas,
Deus rafe n'amzer ni ve voas.

En tal ann tan pen d'eo erruet,
Eur fulven dan a oa lamret :
En poultir, en ludu eo rentet.

Mes pe oa an tan achuet
Mac'harit ne greis so cavet ;
Dindauni eun habit satin guen,
Curunen ar Verc'hez bus de fenn.

Ar boureo cri a c'houlenne
Ha digant Mac'harit neuze :
Mac'harit Frogil din a leret
Petra eo d'an tan no teofe quiet.

Mac'harit.

An tan na ra din droug a bet
Nag al lançonio quen neubeut ;
An Itron-Varia a Voul-Voën
Ra d'ann tan diouzin n'em den.

Ar boureo.

Mac'harit Frogil din a leret
Petra voa d'ar potans n'ho crougue
(quiet.)

Mac'harit.

Ar potans na ra din droug a bet,
Nag ar lançonio quen neubeut :
An Itron-Varia ar Follgoat,
Voa scabel dindan ma daou droad.
Mes me ha brema d'ar Follgoat,
O ia mar gual ma c'halon pad.

Bars er Follgoat pen d'eo arriet
Ar c'hleier da zon zo commanset,
Mac'harit Frogil a lavare
En chapel ar Follgoat p'he daouline :

Bonjour dec'h emezi, Guerc'hez,
Bezit eviden advoradez ;
Me rei dec'h croas, ha bannier,
Ha guisquamant d'ho ter oter.

Me rei dec'h eur gouris coar
Iac a rei ter dro d'ho holl douar,
Ter dro diavez, ter dro diabarz
Dont d'allumin oar an oter vraz.

Me rei dec'h eur bannier voen
Seiz cloc'h arc'hant euz he frejen,
Ha rubannou sei ouz o derc'hel,
Voa quiet he guir peur achuet
En chapel ar Follgoat eo d'cedet.

Homan eo guercz Mac'harit Frogil :
D'ann nep en goar ez eo fassit.
Nep e jileo gant attention
En deus daou c'haot devez pardon ;
Nep he c'han en deuz ouspenn
Joa ann Eavou, mar e goulent !

(Propriété.)